

D'an 21 a viz Kerzu

- Pempvet anv Doue : *O Sav-Heol* (kanet e vez evel dazgwerzad evit ar Magnificat).
- War-dro 250, e Lysia en Anatolia, merzherenti sant Themistokl. Da vare heskinadeg Decius en em ginnigas e lec'h Dioskor ar C'Hristen a veze klasket war e-lerc'h evit e lazhañ. Neuze e voe jahinet war ur marc'h-koad, stlejet war al leur ha bazhataet betek ar marv.
- E 1597 e Fribourg e Bro-Suiz, sant Pêr Canisius, beleg eus Keneilezh Jezuz, doazhour eus an Iliz. Genidik eus Nimegen ez eas er geneilezh a oa nevez flamm, levezonet gant Pêr Favre. Kaset da Vro-Alamagn e labouras a-hed bloavezhioù evit difenn ar feiz katolik hag he c'hreñvaat dre e brezegennoù hag e skridoù, e Levr Katekiz bras pe vihan a voe troet ivez e brezhoneg. Enoret e vez gant katoliked Bro-Alamagn ha Bro-Suis evel o eil abostolour, war-lerc'h sant Bonifas.
- E 1463 e Gwened digoradur ar c'harmez kentañ evit leanezed.

D'an 22 a viz Kerzu

- C'hwec'hvet anv Doue : *O Roue ar Broadoù*.
- E 362, e Roma, merzherenti sant Flavian, tad santez Bibiana. Prefed Roma e voe pa darzhas heskinadeg Juluan an Diansavour. Merket e voe sin ar sklavourion gant houarn ruz war e dal, harluet e voe hag e varvas en dienez.
- E 1917 e Chikago, santez Frañseza Xavier Cabrini, gwerc'hez. Hag hi diazevourez Leanezed Misionerezed ar Galon Sakr en em ouestlas da skoazellañ an enbroidi e Stadoù-Unanet Amerika ha pergen re Italia.
- E Breizh, sant Tinidig, penitiour e Kast er Porzhe.
- En Iwerzhon, sant Evin (Iw. Eimhin), manac'h.
- Sant Conghallach (Konalleg), abad, Iwerzhonad, a savas ur manati e hanternoz enezenn Vreizh.

D'an 23 a viz Kerzu

- Seizhvet anv Doue : *O Emmanouel*.
- Er bloaz 679, e Mouzay e Bro-Loren, merzherenti sant Dagobert II. Hag eñ mab roue Aostrazia sant Sigisberzh III e veve en ur manati pa voe galvet da gemer ar gurunenn. Drouklazhet e voe gant Ebroin, rener ar palez roueel hag e voe sellet evel ur merzher.
- E 1166, sant. Ivo (Gl. Yves), abad hag eskob. Da gentañ abad Chalonied Rreoliek Beauvais e voe anvet eskob Chartrez lec'h ma tiorreas skol an iliz-veur a voe brudet-kenañ.
- E 1193, e Skálholt en Island, ganedigezh en neñvoù sant Thjorlay pe Thorlak, eskob, abostolour, diskleriet patrom an Island e 1984. Hag eñ chaloni eostenat e reas studioù e Pariz hag e Lincoln kent distreiñ d'e vro lec'h ma voe priol e gouent ha diuzet da eskob. Stourm a reas evit adreizhigezh ar gloer, dizalc'hiezh an Iliz ha doujañs an dimeziñ kristen.
- E 1474 e Krakovia, sant Yann Kety, beleg polonat. Genidik eus Silesia e voe anvet, goude e urzhidigezh, prezegenner ha kelenner doueoniezh e skol-veur Krakovia lec'h ma reas berzh kement ha ma savas eneberezh en e geñver. Goude un nebeut bloavezhioù evel person e Oskuz, nepell eus Krakovia, e voe galvet en-dro da gelenn ar Skritur Santel ha sed ar pezh a reas betek dibenn e vuhez. O terc'hel d'ar feiz reizh ha d'ur vuhez vertuzus e voe ur skouer a zeoliezh hag a garitez evit e genlabourerion hag e ziskibled.
- E 1822, e Sao-Paulo e Brezil, sant Anton a Santez-Anna, beleg frañsezat. Ober a reas berzh er brezegerezh hag e ministrerezh ar binijenn hag e tiazegas Retred ar Sklêrijenn lec'h ma voe tad speredel ur gumuniezh leanezed.
- Santez Cuman, c'hoar sant Koulmkell.
- En XVIIIvet kantved, ar pac'hiad Pêr Le Neve, Person Sine e Bro-Gwened.

D'ar 24 a viz Kerzu

- Derc'hent Nedeleg. Eizhvet anv Doue : *O Yezu*.
- Kenkounidigezh holl hendadoù santel Jezuz Krist, mab David, mab Abraham. Eleze an tadoù a blijas da Zoue, a zo bet kavet reizh hag a zo marvet er feiz, hep dezho anavezout sevenidigezh ar grataennoù hogen goude bezañ o gwelet ha kevarc'het eus a bell, ha drezo e voe ganet ar C'Hrist hervez ar c'hreud, hag Eñ Doue benniget dreist an holl gantvedoù.
- War-dro 630, distro da Zoue ene sant Antiochus, manac'h, feizvonnour. Genidik eus Galatia ez eas da vanac'h e laorenn vrudet sant Sabbas nepell diouzh Jeruzalem. Hag eñ kempredad aloubidigezh kriz ar Bersed e tanevellas al lazhadegoù, an distrujadegoù ha learoñsi relegoù ar Basion. Evit ar venec'h skarzhet eus o manatioù ha dirannet eus o levraouegoù e skrivas ul levr o reiñ arroudoù eus ar Skritur Santel, eus an Tadoù ha pedennoù a zo arveret evit lod e lidvezh komplidoù liderezhioù ar Reter.
- E 716, e Wissemburg, ganedigezh en neñvoù santez Irmina a Ceren, abadez. Ganet e Trier eus sant Dagobert II a Vro-C'Hall, e roas da sant Willibrord domani Echternach lec'h ma savas ur manati hag e voe abadez kentañ ur manati a savas e-kichen Trier.
- E 730, santez Adel, abadez. Hag hi merc'h ar roue gall Dagobert II e oa mamm-gozh sant Gregor Utrecht diskibl sant Bonifas abostolour Germania. Goude marv he gwaz ez eas da vanac'hez hag e tiazegas abati Pfazel e-kichen Trier en Alamagn. Diuzet da abadez e voe brudet evit he santelezh hag he furnez.
- Er VIvet kantved, sant Karan (Lt. Caranus), abostolour hanternoz enezenn Vreizh meneget e breviañ Obar Dheathain.
- En Iwerzhon, sant Maelver (Iw. Maolmhuire), manac'h.

D'ar 25 a viz Kerzu

- Nedeleg, Gouel Ginivelezh hon Arloz, Doue ha Salver Jezuz Krist. Naontek kantved goude Abraham, trizek kantved goude Moizez, dek kantved goude David, e voe ganet e Betleem Bro-Youda, evel ma oa bet diouganet, Hor Salver Jezuz-Krist, mab Doue, gant ar Werc'hez Vari, koñsevet ma oa bet hervez ar c'hreud dre c'halloud ar Spered Santel, evit degas ar peoc'h er bed d'an dud a vennantez vat hag evit reiñ klod da Zoue.
- War-dro 257, e Roma, da vare Valerian, merzherenti santez Eujenia pe Ujania, gwerc'hez, dibennet ha sebeliet e katakomboù ar via Latina lec'h ma voe gouestlet dezhi un iliz. Hervez he mojenn e oa merc'h sant Fulub pro-koñsul an Egipt ha goude bezañ studiet ar brederouriezh ez eas da lodennañ buhez ar venec'h o kuzhat a oa ur vaouez anezhi. Kehelet e vez e Breizh pergen e Kersaout er Poudouvr hag e chapel Itron-Varia an Nec'h e Trezeniel e Bro-Monkontour e Pentevr.
- E 303, e Sirmium e Dalmasia, merzherenti santez Anastazia, meneget e Kanon Roman an Oferenn. Lidet e veze d'an deiz-se gant Gresianed Roma a lide Teofaniezh an Arloz hag e Epifaniezh d'ar 6 a viz Genver. Oferenn Pellgent Nedeleg a veze lidet en iliz gouestlet dezhi e-kichen ar Forum. Genidik eus Roma e oa dimezet gant un den diroll anvet Publius. Avielet gant sant Krizogono ez eas d'e sikour pa oa karc'hariet e Aquileia hag e voe bac'het d'he zro. Lakaet war ur vag gant ur c'hristen all ha kant pagan ha tregont e touarjont en enezeg Ponza lec'h ma voent merzheriet. En o zouez e konter hervez lod sant Zoile hag ar santezed Agape, Chionia hag Irena genidik eus Tesalonikê.
- E 1258, e Barselona e Katalonia, sant Pêr Nolask, beleg. Genidik eus eskobiezh Carcassona en Okitania e tiazegas gant sant Remont Penyafort urzh Itron Varia an Drugarez evit dasprenañ ar gristenion ereet, al leaned oc'h en em ginnig e lec'h o breudeur n'o doa ket arc'hant evit paeañ o dalc'hidi.
- E Breizh, er Vvet kantved, santez Koulm, merc'h Konan Meriadeg.
- Sant Maelan, manac'h en Iwerzhon.
- E Breizh, e 1652, Mari-Amis Picard, gwiaderez e Kastell-Paol, kevrinourez.

D'ar 26 a viz Kerzu

- War-dro 36 sant Steven, diagon, merzher kentañ an Iliz. Levr Oberoù an Ebestel a gont e voe dibabet gant an Ebestel evit bezañ unan eus ar seizh diagon kentañ, leuniet ma oa gant gras ar Spered Santel. Reiñ a reas testiñ eus e feiz seizh bloaz goude ma voe kroazstaget Jezuz. E-pad ma veze labezet e pedas evit e heskinerion hag e welas an neñv digor ha Jezuz azezet e klod Doue.
- E 269, sant Denez, pab. Goude heskinadeg Valerian e skedas dre berzh e feiz hag e vertuzioù, e frealzas ar gristenion dre e lizhiri hag dre e oberoù, e tasprenas ar re a oa dalc'het o paeañ priz o daspren, e kelennas an dud dizesk o kinnig diazezoù ar feiz. Bezet e voe e bered Sant-Kalist war ar Via Appia.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Dominig, eskob Gwened.
- Er VIvet kantved, sant Thaze pe Thatai, abad. Hag eñ niz sant Samzun, e voe badezet gant sant Kado hag ez eas e skol sant Ildud. Da gentañ penitiour e Kembre e tiazezas iliz Glamorganshire ha da c'houde manati Llantathan a voe ur skol vanac'hel a-bouez. Ac'hano ez eas da Vro-Went lec'h ma tiazezas ur skol manac'h-all a voe darempredet gant sant Kadog.
- Er VIvet kantved, sant Maezhu, abad, breur sant Kadvarc'h. Diazezañ a reas Llanfaethlu en enez Von.
- En Iwerzhon, er Vvet kantved, sant Mogenog, eskob, niz sant Padrig.
- E 1860, e Plouarzhvael, pac'hiad Yann-Vari de la Mennais, beleg, genidik eus Sant-Maloù, diaze-zour Breudeur ar Gelennadurezh Kristen anvet Breudeur Ploermael ha Merc'hed Ragevezh Doue e Sant-Brieg.

D'ar 27 a viz Kerzu

- Er Iañ kantved, ganedigezh en neñvoù sant Yann, Abostol hag Avielour. Hag eñ pesketour eus lenn Tiberiad, mab da Zebedea ha breur sant Jakez, ez eas Yann da-gentañ da-heul Yann-Vadezour a-raok dont da vezañ diskibl Jezuz. Deuet da vezañ « an diskibl karet gant Jezuz » e voe fiziet e Mari ha Mari he-unan fiziet ennañ ouzh troad ar Groaz. Hervez an hengoun e vevas en Efezos gant ar Werc'hez Vari, ha goude he dougidgezh d'an neñv e echuas e vuhez war enezenn bPatmos, e-lec'h ma voe awenet gant ar Spered Santel da skrivañ levr an Diskuliadur. Miret eo bet ivez un Aviel ha tri lizher kanonel skrivet gantañ.
- E 399, e Roma, santez Fabiola, intañvez. Hervez sant Jerom hag a voe bamet gant he fersonelezh kreñv, en em gavas intañvez goude dispartiañ diouzh he gwaz ha dimeziñ en-dro. Neuze e tibabas ober pinijenn hag en em roas a-grenn da servij ar re baour o reiñ he finvidigezhioù evit diazezañ ospital kentañ ar C'hornôg kristen e Roma.
- E Breizh, sant Alan, eskob Kemper ma voe miret e relegoù en iliz-veur betek an Dispac'h.
- D'ar 27 a viz Kerzu 1994, e Tizi Outo en Aljeria, drouklazh an Tad Alan Dieulangard genidik eus Sant-Brieg a vez lidet d'an 8 a viz Mae.

